

CHANSON AR PLAC'H FIGUS

Var ton : *A bell e va Tibull, Ovid hac Orphée, etc. ; pe Chanson Cupidon.*

En em dennet e han eguis eur soliter,
En eur jardin fleuriet, odorant, saluter,
Trist ha melconius e lavaran ouzin ;
O te fleuren charmant a velan da fin !

Te a bronostic nean, grandeur ar bed
Pini a ziparis evel eur brouil moguet !
O sujet effroyabl a veditation.
O sonjal pis ennot, piou n'a ve en eston !

Guechal o studi er gær deus a Gastel,
Me am boa bet lennet en eul levr immortal,
Eur fablen remerquabl var sujet eur plac'h yaouanq
Hac e doa refuset cats fortunieu brillant !

Mæs pluen La Fontaine dre va'heur zo collet
A dont d he imita jamæs ne vo gallet ;
O geni puissant ! me n a hellin biquen
Laquat e brezonnec graçou eun sort fablen !

Oc'hpen ma zeo rust ha paour ar brezonnec,
E renquer caout talant a speret da brezec,
Da gompos eur chanson evit renta patant
An nerz euz ho fablen a tort ho plac'h yaouanq.

Ar plac'h a ra ar sujet deuz va c'hanouen
A voa en general admiré gant peb den ;
He c'horf a voa charmant, he c'homziou eloquant,
Yaouanq e voa ive ha boquet excellent !

He gueno a vrill evel eur berlezen ;
He diou jod a voa ru evel diou guerczen ;
Scolliet e voa ive gant e mam hag e zad,
Ne vanque sort dezi pe devoa leve mad !

Tud yaouanq distinguet a gaff eur plac'h yaouanq ;
Fountet int e leve, puissant en arc'hant ;
Humblamant e c'houlennont he dorn da zimezi
Mæs fier e respount : « noc'h quet d'am fantasi ! »

Ho guerent, emezi, certain a zo founten ;
Mæs alias ! ne dint quet avoualc'h estimet
Vit sonjal pre'tanti ober eun allianç
Gant plac'h et va seurt-me pere a dal noblanç !

Rac-se, guerset yaouanq, conservit ho potou
Evit mont e lec'h all da glasq ho priejou ;
C'houi tout a zo biannic me bretand caout d'am guis,
Clevit ganen ama, n'oun quet Jannet ar squis

Hema en deus speret, mæs alias ne quet coant ;
Henes en deus gueannet ; mæs n'eus quet a arc'hant ;
Eguile a zo mesvier, eun all a zo re zen ;
Neus hini anezo d'a c'houde ar femellen.

Ton ar baysantet a gaff cals re izel
Bourc hisien ar vepris gant eur galon huel !
Couscoude an noblanç na sonjont quet enni !
Mæs gant he figur gær ema tout he sourci !

Jaloux evel Narciss (1) ec'h admir he guenet ;
Mæs hy e Narcissen biquen ne vo chenchet ;
Rac Saturn a deuyo hardi evel eul laër
Da scuba gant he fal h guenet ar plac'h fier ! (2)

An amzer a ravach an dir hac an houarn ;
Dious clemou tud ar bed e stang he ziscouarn.
Peb generation prout a zo remplacet
Evit rei plac'h d'eun all a zo, d'he zro chenchet !

Plac'hic, deus ma chanson me vel var ho bisach
Deus an oad a dosta ar mercou, ar ravach,
Ho tal a ya ja rida ho tiou jod da voenvi,
Ho bleo blond a guezou, adieu, an dimezi !

Ar botret disprjet a yelo en ho zro
A re-all disterro h souden o remplaço ;
Mæs, plac'h e n'em hastit, dimezi proutamant,
Ober a hellit c'hoas eur pas honestamant.

(1), Narciss, hervez ar mythologi, a oa eun den yaouanq
caër a bras en he c'hened. Eun devez, er chasse, en em
gavas dirac eur feunt-n sclær e pini en em admiras que-
ment, ma teuas da vezi jalouz anezan e unan. E c'his-se
teuas da languissa hac e oue chenchet en eur fleuren gær
galvet, deus he hano Narcissen.

(2) Saturn a represent an Amzer. Armet eo deus a eus
fac'h gant pini a scub hac distanch pop tra,

Me o caff, emezi, eur tamic ridicul.
O tont da bropos d'in fortuniou hep mûsul,
O tonet d'am pressi en digarez oad
Da ober alliaç gant peorrien anat !

O pebez bas velen, o pebez discourer !
C'hui a fell deoc'h eta e siffen va affer
Gant potret diasez, pe gant goz intanvien,
Mæs allas ! camarad, me noun qet eur soden !

Fountet oun e leve a deus eur famil vad,
Pa guir'n gant enor, me rayo va c'hrogad ;
Mæs deport a rin c'hoas eun neubeudic amzer.
Rac o ven yaouanquis, jamæs, sûr ne squiser.

Ar plac'hed yaouanq fur ne dint qet presset bras
Da rei ho liberte evit consquet gand goas ;
Guel eo gante certen mouet d'ar pardonniou,
Caër evel princeset da c'hoapat or yannou !

Imprudent bras e ve dont da veza potrez
Goude gant plijadur beza bet ar vestrez,
Forcet he peb feçon da soubla da zenti
Oc'h eun den soupçonus a leun a jalousi !

Honnes e ve ar joa guelet eun den mechant
O tont da garnachi goude dispign arc'hant,
O tont leun ar goler da sonjal commandi
Ar pez n'eo qet capabl e unan da regli !

An oll, plac'hic yaouanq, ne din qet tud mechant ;
Cals a voar anezo espern mad o arc'hant ;
A ma teuont aveichou da ober gourdrouzou
Eo gand aon na gouste re an danielezou ;

Ho discours, va den mad, a zo neubeut fountet ;
Parlant a rin brenan eus avaristed ;
O pebez levez e dime beva
Gant eur tyrant crassus a ra din clasq bara ;

Tavit eta, m'ar plich ; me gar va liberte ;
Countant oun plac'h yaouanq dre ar chraç a Zoue ;
Ravisset e gers'n da ober cadançon
A da fredoni gant o parlant d'ar yannou ;

Mæs allas ! potrezic, pa vo rioet ho min,
N'o peo qet ar yannou d'a zridal, da c'hoarzin,
Oll neuze o lezint en eur joa o fen,
Re goz, eo emezo, bisac'h ar femelen ;

Eur figur discaret a zo nebeut nerzus
Evit sonjal attrap yaouanquis gobius ;
Rac minet gant amzer, ar rozennic goenvet,
Adieu, qeavezo, n eus qen a c holantet !

Tud deus an drede urs a parlant c'hoas d'ar plac'h
Mæs allas ! dister int, ne dileomp qet breman nac'h

Guerzet hep...
En eur gær...

Ar femele...
A ra deza scub...
O lavaret dezo gant...
« Perac e tui aman... »

Goall hardis o cavan en ho pretention
O tont da glasq merc'het deus va condition
Chenchbit da santimant a ne ze zuit mui
D'am z'y qen affrontet vit va dishonori

Plac'hic deus va chanson. Saturn zo direspect,
Pa se vor an houarn, e ruina o quenet,
Ho roz a perisso, c'houi vezo en glac'har,
Mæs caër o po crial, e rei scouar vouzar !

Eun ty pa ve coëset a helleur da zével,
A da repari couls, aliez me mesguëll ;
Mæs allas, femmellic, ho charm a dremeno,
Evel eur vogueden, a den n e reparo !

Vit souten quemenman, passeomp dre eur jardin
Ramplisset a ros caër, a lys hac a jasmin.
Eno e n'em rentet, ni velo pen minuten
Betec ar vourjouden o pilat eun deillen !

Ar burjonn a zec'ho prest gaud ho ornamant ;
Ivez ho sort, allas ! plac'hic yaouanq ;
Mæs c'hoas ma n'am c'hredit clasqit eur melezour,
Ennan e velfot sclær ravach oc'h adversour ! (1).

Ar sclassen a grio : « plac'h demes prontamant ;
« En da c'hénet ez euz calzie a chenchamant ;
« Bet on Venus hor bro, mæs alias ! ne dont mui !
« Entent eta respont ni ar sonjes dimezi ? »

Ar femelen oaget a zo eta fier ;
Er fortuniou brillant cals c'hoas ec'h esper ;
Ar poënt a so tremenet, erfin eza eun tu,
Mæs petra deus y nemert eur Malotru !

A comprenet oc'h eus em chanson, plac'h figus
Petra erru ganec'h goude quen liez refus ;
Mæs furroc'h dimezit conform d'ho quendere.
Diouallit dioc'h goall lann, diec'h ar ridou ive !

Rac evel nier goussoc'h hep doutanç eben
An dud re ourgouillus a vezo discaret ;
Rac evit curuni va chansonnic vatant ;
En pensieur er mor gant re a naon arc'hant ?

(1). An amzer pe Saturn.